





# Diplôme de Compétence en Langue Breton

Session du samedi 24 mars 2012



## Dossier documentaire


Support de la Phase 1















 Document 1	Ti-Embann Breizh	Page 2
 Document 2	Ul lennad lennadennoù	Page 3
 Document 3	ur romant istorel	Pages 4-5
 Document 4	An embann brezhonek : peadra da choaz evit an holl ?	Pages 6-7

Document 1 :

# Ti-Embann Breizh abaoe 1980

Degemer
Piv omp ?
Roll-levrioù
Hag a nevez ?
War internet
Ho prenaadennoù



			<p>Betek-henn e veze kinniget levrioù evit ar vugale hag ar grennarded gant Ti-Embann Breizh. Bremañ hon eus c'hoant bras da ginnig traoù all ivez. Neuze, m'ho peus skrivet un istor bennak, kasit ho tornskrid deomp, dre lizher pe dre bostel. Marteze ho po ar blijadur da welet ho skrid embannet !!!</p>		
	<p>Ti-Embann Breizh zo bet savet e 1980, da-heul krouidigezh ar skolioù divyezhek. Hor pal kentañ a oa embann levrioù evit ar babigoù hag ar vugale. Dre ma koshae ar re-se eo aet an dachenn war vrasaat ha goude romantoù evit ar grennarded e klaskomp embann levrioù evit an dud deuet.</p>				
					

*Ti-Embann Breizh* - 15, straed ar C'hoc'hu - 29270 Karaez - [teb@ti-embannbreizh.org](mailto:teb@ti-embannbreizh.org)

## Document 2 :

## Ul lennad lennadennoù

Mard it da vale e-kostez lenn Gwerledan, n'hellit ket chom hep mont da derrañ ho sec'hed ha magañ ho spered e Ti Nanna, skrivagnerez ha tavarnourez.

Eno e voc'h degemeret gant c'hwezh vat ar c'hafe evel e kement tavarn zo er vro, met ouzhpenn kement-se en em gavoc'h beuzet en ur mor a levrioù. Met na rit ket bil ! Aze e vo Anna Lozac'h, mestrez an ti, prest da reiñ un taol-sikour deoc'h d'ober ho soñj ha da choaz an evaj hag al levr a blijo deoc'h, a dra sur !



**Lârit din, Anna, perak zo kement a levrioù amañ ?**

D'am zud e oa an davarn-mañ. Ha me 'gar al levrioù, neuze bremañ pa'z on-me e penn ar voutik e faot din meskañ labour ha plijadur.

**Petra a zegas al levrioù deoc'h ha d'ho klianted ?**

Sot on gant an istorioù a-c'houde on-me plac'hig, ha pa ve istorioù kontet gant an dud, pe c'hoazh romantoù. Gwerzhañ levrioù zo un digarez da zebatal, da eskemm soñjoù. Me a blij din kaozeal ha daremprediñ a bep seurt tud. N'eus ket gwell evit un davarn evit bout tost d'an dud ha d'o buhez.

**Sur a-walc'h e vez klevet kalz istorioù amañ ?**

Bemdez e klevan istorioù gant ar re a za da evañ un tasad ha da brenañ levrioù : istorioù poanius, marvailhoù, gevier, traoù pemdeziek,

da ouelañ pe da c'hoarzhin... Ha neuze em eus lakaet e ma soñj tennañ awen diouzh an traoù-se da skrivañ danevelloù.

**Ho soñj eo embann un deiz bennak moarvat ?**

Just a-walc'h em eus kaset ma dornskrid kentañ d'an tier-embann. Emic'hañs e plijo dezhe ma mod da gontañ buhez tud ma bro. Fiziañs am eus er santimantoù am eus lakaet e-barzh pep danevell : farserezh, glac'har, spont ha melkoni. Hag e brezhoneg, mar plij !

**Tudennoù hoc'h istorioù zo tud wirion ?**

N'int ket tud wir, mes tudennoù ijinet diwar tud deus ar vro. A-gement seurt tud a vez kavet em danevelloù : tud yaouank, labourerien-douar, touristed, sonerien... Plijadur o do al lennerien o heuliañ santimantoù ar re-se. E-touez an holl istorioù-mañ - ar c'higer aet skuizh gant e wreg, trafikourien traktorioù, un istor karantez etre un tourist ha kornandonez al lenn - e kavo pep unan e lod.

**Ha peseurt titl ho peus roet d'ho levr ?**


«Ar vord al lenn» abalamour d'al lenn hag a ro buhez d'ar vro hag a zegas tud betek an davarn hag abalamour d'ar c'hoari-gerioù etre «denn» ha «denn» evel-just !

**Ha perak skrivañ e brezhoneg ?**

Atav am eus bet klevet brezhoneg, ha lod kaer eus ar pezh am eus klevet zo bet kontet din e brezhoneg pe e galleg gant leun a droioù-lavar eus ar vro. Evidon-me eo yezh ar santimantoù.

Komzoù dastumet gant M. W.

## Document 3 :



The screenshot shows an email client window. At the top, there are fields for 'À...' (To) containing 'teb@ti-embannbreizh.org', 'Cc...' (Carbon Copy), and 'Cci...' (Blind Carbon Copy). Below these is the 'Objet : kinnig dornskrid' (Subject: book review) and an empty 'Attaché :' (Attachments) field. The main body of the email contains text in Breton. The text discusses a book review by Marc'heger Dispont, mentions 'Hanter-Dall' and 'The Hidden Truth', and discusses the author's background and the book's content. The sender is identified as Lomig Le Pipec.

Demat deoc'h,

Tro am eus bet da labourat ganeoc'h c'hoazh, pemp bloaz zo, pa oa bet embannet *Hanter-Dall, ar Marc'heger Dispont*, ur romant faltazi evit ar re yaouank. Bremañ e teuan en-dro gant ur romant istorel bet troet ganin diwar ul levr skosat *The Hidden Truth (Ar Wirionez Kuzh)* skrivet gant MacAllan evit an dud deuet.

Savet mat eo an istor, desket e vez kalzig a draoù diwar-benn ar gevredigezh er grennamzer, taolennet mat eo an tudennoù, o buhez personel hag o zechoù fall. N'eo ket danvez ar sekred ar pep pouezusañ el levr nag e spered Sir Edward Fox : ar pouezusañ eo an itrikoù en-dro dezhañ, galloudoù an Iliz hag ar galloudoù sivil, ar galloudoù e diabarzh an Iliz, ar stourm a-enep an disivouderien hag ivez stad ar gevredigezh (komzet e vez eus laeron-vor war aodoù Bro-Skos...).

Amañ dindan e kavoc'h ur pennad am eus troet diwar The Guardian. Ennañ e vo kavet an istor berr-ha-berr. Deoc'h da c'houzout : n'eo ket bet troet al levr-se e galleg c'hoazh.

Emichañs e plijo deoc'h hag ho po c'hoant da embann anezhañ.

Kasit keloù din m'ho peus c'hoant da lenn anezhañ en e bezh. |

A galon,

Lomig Le Pipec



## Levr nevez MacAllan !!!

Deuet eo er-maez romant nevez John MacAllan, mezeg bet kelenner e Skol-veur medisinerezh Edinburg, ma kaver ennañ Sir Edward Fox evel haroz kentañ “county coroner“ Inverness-shire. Da vare William Wallace e c’hoarvez an darvoudoù en ul lodenn eus Bro-Skos e lec’h m’eo bevmat ar gouezeleg c’hoazh.

Ar wezh-mañ e vo touellet an haroz gant unan eus e gengadourien e-pad brezelioù ar Groaz, Geoffroy de Montfort, ezel eus Urzh an Templ... War an tec’h emañ-eñ abalamour d’ar sekred spontus bet dizoloet, a-hervez, gant menec’h an Templ e Jeruzalem : ne vefe ket marvet Jezus war ar groaz, bevet en defe un tregont vloaz bennak goude bezañ bet savetaet gant mignoned dezhañ, dimezet gant Mari Madalen, bet seizh bugel ganti ha marteze aet ganti da echuiñ e vuhez kostez Tolosa, er vro a zeuas war-lerc’h da vezañ hini ar Gatared...

John East, The Guardian, miz Genver 2012

***The Hidden Truth**, gant John MacAllan, 258 pajenn  
Alba Press, 2011, 10.99£.*

## Document 4 :




## An embann brezhonek : peadra da choaz evit an holl ?

## Petra a vez embannet e brezhoneg ?

War-dro 80 levr brezhonek<sup>1</sup> a vez embannet bep bloaz, da lavaret eo 6% eus ar pezh a embanner e Breizh<sup>2</sup>. Ur c'hresk bihan a oa bet e 2003 met un digresk bras e 2004 abalamour oa bet serret ti-embann An Here ha cheñchet skipailh Kuzul-rannvro Breizh.

Setu an niver a levrioù deuet er-maez etre 2000 ha 2009 diouzh oad al lennerien.



Embannet e vez levrioù evit an dud deuet dreist-holl met o cheñch emañ an traoù : muioc'h a levrioù evit ar vugale hag ar grennarded a zo.

Embannet e vez romantoù dreist-holl : 50% eus ar pezh a vez embannet en holl pa n'eus nemet 20% e Frañs a-bezh.

## Levrioù evit an dud deuet

War-dro 50 levr evit an dud deuet a zeu er-maez bep bloaz. Oberennoù lennegel int dreist-holl. Ne vez ket embannet kalz a levrioù, avat, o tennañ d'an arz, d'ar vuhez pemdeziek pe da skiantoù Mab-den, nag a vannoù-treset.

## Levrioù evit ar grennarded

Treut ar peuriñ evit ar grennarded, avat, gant un dek levr bennak nemetken embannet bep bloaz. Levrioù-skol eo an dam vrasañ eus al levrioù-se ouzhpenn. Emañ an traoù o cheñch tamm-ha-tamm a-drugarez da embannerien zo, evel Bannoù-Heol, a zo staget da embann bannoù-treset hag a blij d'ar re

<sup>1</sup> Pa gomzer eus levrioù brezhonek e reer anv eus levrioù e brezhoneg penn-da-benn met ivez eus levrioù divyezhek.

<sup>2</sup> Hervez ar C'huzul-rannvro e vez embannet 1300 a levrioù e Breizh bep bloaz.

 Document 4 (fin) :

yaouank, evel "Titeuf" lakaomp. Gant TES<sup>3</sup> ivez e oa bet roet lañs d'ur rummad nevez evit ar grennarded e 2005. Gant "Priz ar yaouankiz", savet gant FEA<sup>4</sup> e 2004, eo aet war-raok ar c'hroulfi evit ar grennarded hag an niver a romantoù embannet ivez.

#### Levrioù evit ar vugale

Ar pep brasañ eus ar pezh a vez embannet evit ar vugale (60%) zo lennegezh. War an dachenn-se en doa ti-embann An Here kalz a bouez betek 2004 ma oa bet serret. Hiziv an deiz eo tiez-embann all evel Bannoù-Hed, Delloù ha Keit Vimp Bev a sav levrioù evit ar vugale. A-drugarez dezho e kresk an niver a levrioù embannet evit ar vugale : un 30 levr bennak embannet e brezhoneg pe e brezhoneg-galleg bep bloaz abaoe 2007. Bremañ, avat, e vez graet al labour-se gant tud a youl vat an aliesañ tra ma oa tud a-vicher e ti An Here.

Evit digreskiñ koust an embann eo krog Keit Vimp Bev da genlabourat gant tiez-embann e Frañs dre ar gevredigezh Coopelingua. Kenembann a reont levrioù evel ma raent dija gant ar c'hazetennoù abaoe 2001. Tri levr zo deuet er-maez evel-se e 2006 e brezhoneg, en okitaneg, e katalaneg hag en euskareg. A-drugarez d'ar c'henlabour-se e vez embannet muioc'h a levrioù er yezhoù-se.

Traoù nevez a vez embannet dreist-holl : 90% eus al levrioù embannet e brezhoneg, pa n'eus nemet 51% e Frañs a-bezh.

An tri c'hard eus al levrioù brezhonek a vez savet diwar netra ha n'eo ket troet diwar yezhoù all. Kement-se a dalvez muioc'h c'hoazh evit al levrioù divyezhek. Gant-se eo anat ez eus un diouer a levrioù eus al lennegezh etrebroadel bet lakaet e brezhoneg.

Ur 1300 a skouerennoù bennak a vez moullet eus pep levr brezhonek ha betek 2400 evit al levrioù divyezhek. Al levrioù-deskiñ hag ar geriadurioù eo a vez gwerzhet ar muiañ.

*Diwar ur studiadenn gant Ofis publik ar brezhoneg*

---

3 Ti-embann ar skolioù brezhonek.  
4 Fédération Education Animation.